



Sindikad
Sta
an **D**eskadurezh
Kentañ
Prevez

CGT (Kengevread Hollek al Labour) – Deskadurezh prevez

Kombod 544 - 263 straed Pariz
93515 MONTREUIL CEDEX

☎ 01.42.26.55.20
Plr 01.49.88.07.43

Load www.cgt-ep.org
Postel contact@cgt-ep.org

Levrig degemer an ezel nevez


(Doare C'hwevrer 2012)

C'hwi zo :

- Kelennerien ar skolioù prevez dindan gevrat Stad (kentañ hag eil derez, labour-douar) ;
- Koskorioù Melestradur, Deskadurezh, Armerzh ha Servijoù (PMDAS – PAEES) ;
- Kelennerien pe stummerien ar skolioù e dalc'h Kenemglev-micher an USDUKA (UDESCA).

Evit :

- Ur servij foran gwelloc'h ;
- Ur servij deskadurezh diouzh ezhommoù ar re yaouank, ar familhoù hag ar vro, a vir ouzh ar c'hwitañ er skol ;
- An doujañs d'ar C'henemglevioù-micher ;
- Kresk ar goproù diouzh koust gwirion ar vuhez ;
- Un emziviz sokial a zouj an dud e pep diazezadur.



GREOMP ASAMBLES

O
B
E
R

E

P
E
P

F
R
A
N
K
I
Z

I] An SSDKP (SNEIP) Unan eus sindikadoù ar CGT

Ho pediñ a ra ar CGT da zont diouzhoc'h en hec'h obererezh hag er vuhez sindikel, da vezañ lodek ha da ziorren enni. Ouzhpenn kargidi, dileuridi, dilennidi pe kannidi c'hoazh a ya da ober ar CGT. Kenober gant poell e 650000 ezel eo nerzh pennañ ar CGT a-benn gwellaat kerzh an holl. En em gavout a ra an holl c'hopridi « *Asambles evit ober* ».

Bezañ sindikadet en SSDKP - KHL (SNEIP - CGT) Deskadurezh prevez a zegas gwirioù

Gwir da gemer perzh – Gwir da zivizout

Dre zibab an demokratelezh ez a ar CGT en-dro. Asambles gant ar sindikadidi e vez hentet. Bezañ keodedad zo e-kreizig-kreiz ar vuhez sindikel : reiñ e savboent, tabutal ha kaout krog war an divizoù da vezañ kemeret, engouestlañ er vuhez sindikadel, sammañ atebegezhioù ma venner.

Gwir da vezañ stummet

Ur gwir evit an holl dud gopret pe zilabour eo ar stummadur sindikel pa vefent sindikadet pe get, gant ma vezont stummet gant un aozadur sindikadel dileuriañ.

Gwir da vezañ kelaouet

Kazetennoù zo d'ar CGT, gant ar pal lakaet dezho tennañ splot anezho evit preder pep hini a-benn ober e soñj, kaout perzh er c'heneskemm evit kendivizout.

Digor war bed al labour, talvoudus evit kevredañ da zifenn pep mad d'an holl hag aozañ ar stourmoù a ya da unvaniñ war an dachenn lec'hel ha broadel, en Europa hag er bed.

- « **Le Trait d'Union** » (= « *ar varrennig-stagañ* ») : kazetenn niverel hor sindikad, bep daou viz well-wazh, dezhi ul lizher kelaouiñ reoliek d'he c'hlokaat.
- « **Le Lien** » (= « *al liamm* ») : kazetenn ar KDES (FERC), hor c'hevread an hini eo : 4 niverenn bep bloaz.
- « **Perspectives** » (= « *diaweladoù* ») : kazetenn kenlabourerien an deskadurezh publik, enni ul lodenn savet ganimp : 6 niverenn bep bloaz.
- « **La Nouvelle Vie Ouvrière** » (= « *buhez nevez ar vicherourien* ») : keleier sizhuniek ar c'hengevread CGT, evit an holl sindikadidi. Pep den sindikadet a c'hall koumanantiñ dezhi. Gant an embannadenn-se e heulier an oberiantiz etremicherel ha kavet e vez danvez a-zoare en he bannoù a-zivout difenn ar c'hoskorioù.

Da betra ur skodenn sindikad ?

Talet ingal h-e skodenn gant ar sindikadad-ez emañ homañ pe hemañ er CGT evit gwir. Gwareziñ a ra bezañ distag diouzh ar batromelezh hag ar galloudoù publik. Ez reoliek e vez lakaet ar skodenn 1 % eus ar gopr rik evel pennaenn ar reizhded, ma vez pep ezel o paeañ e skodenn diouzh e c'hopr pe gounidoù all.

Evit mērañ aezetoc'h hag ingal e tremen ar CGT gant treuzvankadennoù ar skodennoù sindikad da skorañ ur mererezh poellekoc'h evit ar sindikad hag ar sindikadidi ken ha ken. Reiñ a ra ar skodenn-se gwir da gaout 66 % a zigresk telloù.

II] An SSDKP (SNEIP) er CGT

Pa sindikadit e teuit en ur rouedad ma talvez pep hini en e anv er framm anezhi, ma vez dalc'het kont eus meno an holl, pa vez divizet a-gevret eus ar pezh a zo da ober evit ar c'hopridi da sevel o mouezh, da lakaat doujañ o gwirioù ha gounit re all. P'emañ lakaet boutin o araezioù hag o nerzh eo kreñvoc'h ar sindikadidi da argas kement diviz kemeret diwar-skañv hag an direizhded. Dre vezañ sindikadet e startait frankiz ar c'hopridi.

Un dra ret eo.

Bernard THIBAUT

Ar rouedad sindikad kentañ

A-hed hec'h istor eo deuet ar CGT a-benn a gaout meur a framm, micherel hag etremicherel, dezho o mont en-dro, o aozadur, o fal.

Ar c'hevreadoù



Anezho 33, sindikadoù ereet ouzh ur skourr micher pe meur a hini (Kevread ijinerezhioù ar gounezvouederezh ; Kevread ar Saverzh...) az a da ober ar c'hevreadoù micherel Stad.

Kevread an Deskadurezh, an Enklask hag ar Sevenadur eo hon hini. Bodañ a ra KDES (FERC), en o zouez, kelennerien an deskadurezh publik pe brevez, ar stummerien, ar gasourien.

An unvaniezhoù tiriad :

- Ar Poellgorioù-Rannvro : anezho 21 dindan atebegzh an unvanvezhoù-departamant ez eus tu enno evit lakaat difretañ ar CGT davet ar rannvroioù melestradurel hag o ensavadurioù (KASR [CESR] – Kuzulioù Armerzh ha Sokial ar Rannvroioù, lakaomp).
- An Unvaniezhoù-Departamant : anezho 96 o vodañ ar sindikadoù ha kevrennoù sindikad an holl vicherioù dre zepartamant. Aozañ ha diorren a ra ar c'hengred etre an holl c'hopridi, gant un implij pe get, hag an dud war o leve ivez.
- An Unvaniezhoù Lec'hel : ur rouedad a 857 unvaniezh lec'hel zo, dasparzhet war ar Stad a-bezh, gant sindikadoù ha kevrennoù sindikad an hevelep takad ouzh o ober (lec'hiadenn, diazad labour, takad greanterezh pe kenwerzh, hag all) a ya da vagañ ur sindikadelezh tost d'an dud a zere ouzh pep degouezh.

III] Aozadur ar SSDKP (SNEIP)

Aozadur hollek

Sindikad Stad an Deskadurezh Kentañ Derez Prevez (KHL - CGT – Deskadurezh Prevez) eo ho sindikad micherel emezelet ouzh KDES (FERC) – Kevread an Deskadurezh, an Enklask hag ar Sevenadur. Klotañ a ra e zezvadoù gant re ar C'hengevread. Gant kendalc'h ar sindikad, bodet bep 3 bloaz, e vez termenet palioù. Daou deuliad diazez buhez hor sindikad a c'hoarvez eus an dezvadoù hag ar palioù termenet ; en linenn emaint evit an izili.

Tost da 1500 ezel zo en SSDKP (SNEIP) a stroll gopridi an **deskadurezh prevez dindan gevrat**, forzh pe gefridi bennak e sammfent : koskor kelenn hag ankelenn ar skolioù, ar skoloù hag al liseoù prevez kredennel pe laik, re ar skolioù labour-douar hag an deskadurezh uhel prevez dindan feur an USDUKA (UDESCA) ivez.

Ma labourit en unan eus ar gennadoù-se p'emaoc'h ezel eus an SSDKP-KHL (SNEIP-CGT) Deskadurezh prevez e tennit splot eus :

- Ditouroù eus ho kennad micher ;
- Skoazell m'ho pefe diaesterioù ;
- Kuzulioù evit diorren hag aozañ un obererezh sindikad en hoc'h embregerezh ;
- Prantadoù stummañ war an armerzh, ar gevredadelezh hag ar sindikadelezh.

Ken oberiant e emdroadur ho micher ha lodek en araokaat sokial e teuit da vezañ.

Gallout a ra pep sindikadad-ez mont en ur stern diouzh h-e b-varregezhioù : delc'her ur burev-pad, an teñzoriererezh, bezañ oberiant er bodadoù (kehentiñ, ober, implij, gwir ha lezennoù, kelennererezh kentañ, eil derez, uhel, labour-douar...), bezañ en anv ar sindikad en aozadurioù diavaez.

Gant dileuridi ar SSDKP-KHL (SNEIP-CGT) bodet e kendalc'h an 20 hag 21 a viz Here 2011 e oa bet degaset da soñj ez eo bet lakaet da bal pennañ d'ar sindikad sevel ur servij foran meur, laik ha digoust, diwar an Deskadurezh Stad. E diabarzh ar CGT e vennont denesaat ouzh o c'henlabourerien en deskadurezh publik an abretañ ar gwellañ, e-touez ar c'hKHL Desk'ober (CGT Educ'action), dre an SDDS (Sindikad-Departamant an Deskadurezh Stad - SDEN) ha gant ar c'hKDES uhel (FERP Sup). Da neuze, dre lakaat kevret holl koskorioù an Deskadurezh Stad, da lavaret eo ar gefridiaded, re an Deskadurezh pe ar gelennerien, e tlefemp kas pelloc'h arc'hadurioù ar CGT a zo ret evit gwellaat hon dezvadoù, hon aozioù labour, ha talvoudegezh ar stummadur kinniget d'an deskidi.

Kement ha kemm e vo dav mont gant perzhioù pep rummad koskorioù ar skolioù prevez – kement eus an Deskadurezh Stad hag eus hini al labour-douar pe eus ar skolioù uhel – a c'hallou en em gavout a-dra-sur er c'hKHL-desk'ober (CGT Educ'action) e-mesk bodadoù labour pe kengorioù a-ratozh.

Ensavioù ren ar sindikad

Ar Burev Stad

Dilennet gant ar BSS (Bodad-Seveniñ Stad, *CEN*) e ro tu da lakaat e zivizoù e pleustr eus un ensav d'egile ha lakaat obererezh ar sindikad da dalvezout a zeiz da zeiz.

Pennsekretour
Penndeñzorier
Sekretour an Aozañ
Ezel

Fulup ar Braz (*Philippe Legrand*)
Michel Aman
Damien Smagghe
Charlotte Matyja

Ar Bodad-Seveniñ Stad

Bodadenn ren ar sindikad eo ar BSS, dilennet er c'hendalc'h. Bodet e vez 3 gwezh ar bloaz. 28 ezel zo enni. Dilenn a ra ar Burev Stad.

Bodadoù-seveniñ

Bodad-seveniñ AMDK (*OGEC*) ha gwir prevez
Bodad-seveniñ Ragevezh
Bodad-seveniñ Gwirelezh
Bodad-seveniñ Kehentiñ
Bodad-seveniñ Stummadur Sindikadel
Bodad-seveniñ Deskadurezh Uhel
Bodad-seveniñ Ahelioù Arc'hiñ

Bodadoù labour kevreadel ha kengevreadel

Evit mont e darempred

War ho tro

Kit war al lec'hienn www.cgt.fr hag eskemmit gant ar frammoù lec'hel **UL** pe dre zepartamant **UD**.

SSDKP (*SNEIP*) dre c'hennad

Evit an deskadurezh eil derez

Fulup AR BRAZ (*Philippe LEGRAND*)
Serge VALLET

☎ 06-11-99-80-62
☎ 06-06-48-61-85

seconddegre@cgt-ep.org

Evit ar c'hoskorioù AMDK (*OGEC*)

Danielle LARRAZET
Céline DEL AGUILA

☎ 06-86-24-21-07

personnelogec@cgt-ep.org

Evit an deskadurezh uhel

Christine FOURAGE

☎ 06-83-81-02-99

udesca@cgt-ep.org

Evit an deskadurezh kentañ

Véronique DENYS
Patricia HECART

☎ 01-42-26-55-20

premierdegre@cgt-ep.org

Evit an deskadurezh labour-douar

Damien SMAGGHE

☎ 06-08-18-69-87

agricole@cgt-ep.org

Rannvro	Anv	Pgz	Postel
AMIENS	Alain LAMBLIN	06-22-66-58-96	academie.amiens@cgt-ep.org
CAEN	Serge VALLET	06-06-48-61-85	academie.caen@cgt-ep.org
BESANCON	Edwin ALONSO	06-99-17-84-67	academie.besancon@cgt-ep.org
DIJON	Edwin ALONSO	06-99-17-84-67	academie.dijon@cgt-ep.org
BOURDEL	Jacques DANIEL	06-75-79-59-51	academie.bordeaux@cgt-ep.org
CLERMONT-FERRAND	Frederic ALLARD	04-73-83-45-08	academie.clermont@cgt-ep.org
CRETEIL	Jean Michel ROCA	01-45-76-45-72	academie.creteil@cgt-ep.org
ENEZ FRAÑS	Permanence	01-44-84-51-27	idf@cgt-ep.org
GRENOBLE	Patricia L'ECOLIER	04-76-75-67-10	academie.grenoble@cgt-ep.org
ROUAN	Eric JOUEN	02-35-92-18-62	academie.rouen@cgt-ep.org
MONTPELHIER	Philippe WAESELYNCK	04-68-53-60-45	academie.montpellier@cgt-ep.org
NANCY-METZ	Marc-Pierre GONTARD	03-87-32-30-43	academie.nancy-metz@cgt-ep.org
POITIERS	Gilles MARECHAL	05-49-72-14-89	academie.poitiers@cgt-ep.org
LIMOGES	Arlette DENICHOUX	06-70-51-50-43	academie.limoges@cgt-ep.org
LYON	Ginette MOULIN	06-84-05-62-08	academie.lyon@cgt-ep.org
AIX-MARSILHA	Laurent ROI	06-26-32-93-18	academie.aix-marseille@cgt-ep.org
NISA	Marie-Thérèse FLUCHA	04-93-26-13-92	academie.nice@cgt-ep.org
LILLE	Christian DELBEKE	03-20-52-74-67	academie.lille@cgt-ep.org
ORLEAÑS-TEURGN	Dominique LIEBUS	02-47-50-56-22	academie.orleans-tours@cgt-ep.org
PARIZ	Corinne SAGLIET	01-44-84-51-27	academie.paris@cgt-ep.org
NAONED	Yves WEBER	02-28-08-29-98	academie.nantes@cgt-ep.org
REIMS	Alain BIELKA	03-26-09-75-53	academie.reims@cgt-ep.org
ROAZHON	Pascal PICOL	06-85-26-46-36	academie.rennes@cgt-ep.org
STRASBOURG	Marc-Pierre GONTARD	03-87-32-30-43	academie.strasbourg@cgt-ep.org
TOLOSA	Gilles BIRIOUKOFF	06-16-35-49-19	academie.toulouse@cgt-ep.org
VERSAILHEZ	Monique COUTEAUX	01-44-84-51-27	academie.versailles@cgt-ep.org
DTM-TTM	David DARVIN	06-94-13-22-79	domtom@cgt-ep.org

Koumanantit da embannadennoù ar CGT



Troet oc'h ouzh al labour, e aozioù labour war ar pemdez, arc'hadurioù an dud e-sell ar yec'hed, an doujañs, ar reizh, ar gevatalded.

Sachet eo hoc'h evezh gant ar sindikad, e savlec'hioù hag e stourmadoù, e savboent war kement dalc'h zo en hor c'hevredigezh. Mennet oc'h gant an darempredoù etre ar pobloù er bed, o stourmoù evit an diorren hag ar peoc'h.

"Le Peuple" (Ar Bobl) a sav pennkomz a gement-mañ, dre sellad luskadourzed ha luskadourien ar sindikad. Aozañ a ra tabutoù, e doare taolioù krenn, dre lakaat tal-ouzh-tal. Embann ha renabliñ a ra holl savboentoù kefridiel ar Cgt.

War lec'hienn ar gazetenn, daouviziek anezhi, e kavot taolenn an niverenn ziwezhañ, un diaz-stlennañ teulioù ar c'hengevread ennañ, hag istor ar gazetenn, bet savet e 1921.



Keleier sokial hep mar na digarez

La Nouvelle Vie Ouvrière (Buhez Nevez ar Vicherourien) zo anezhi sizhunieg ar CGT evit he holl sindikadidi hag ar c'hopridi.

Emañ ar bed o treiñ, ar c'heleier o vont timat.

Kaset da benn gant ur skipailh tud a vicher e tigej ha tielfenn ar gazetenn-se ar pep brasañ eus ar c'heleier sokial ha sindikadel bep sizhun evit kas al lenner da anavezout ha kompren mont en-dro an embregerezhioù war ar bed-holl.

Adkavit bep sizhun he rubrikennoù, keleier, sindikadoù, kevredigezh, gwirelezh dre goumanantiñ d'al lec'hienn.

IV] Lec'hienn an SSDKP (SNEIP)


www.cgt-ep.org

Ur rubrikenn a vez kinniget dre rann ar sindikad ganti.

Pep rubrikenn a zegas teuliadoù (e stumm « pdf ») ditourañ, renabliñ ar goulennoù / respontoù stankañ a vez graet gant an izili, hag ur pennad-stur da zegemenn ar c'heleier.

Foromoù a ya da glokaat an eiennoù lies-se a zitouroù.

Rubrikennoù hollek a ginnig an dilennadegoù micherel, an ensavadurioù dileuriañ gwirer hag elfennoù lezenn. Evit gouzout hon istor, hon dezvadoù, hon arc'hadurioù, testennoù hor C'hendalc'h, darempredit hol lec'hienn bepred !



SNEIP-CGT : Adhérent

Nom d'utilisateur:

Mot de passe:

Vous n'avez pas encore de compte **Demande de compte (réservé aux adhérents)**.

Mirout a ra al lec'hienn ditouroù zo evit hec'h izili. Evit mont warni eo ret kevreañ outi dre an anavezorioù da-heul :

Anv implijer
Ger-tremen

dav eo goulenn ganimp :
contact@cgt-ep.org

Roll skignañ

P'emaoc'h oc'h emezelañ oc'h enskrivet en hor rolloù skignañ er Stad hag dre akademiezh a-benn degemerout hon holl embannadennoù niverel hag hor c'heleier.

E
N
D
I
R
E
C
T

V] Ar sindikadañ

Sindikadit unan eus ho kenlabourerien kerkent ha bremañ ! Ar youl da vezañ kevret eo an emsav sindikad, stag ouzh an diviz an-unan da vont er sindikad : na chomit ket da dostañ evit komz eus ho tefrae d'an dud tro-dro deoc'h neuze, lakait da emezelañ asambles ganeoc'h ! Emezelañ ouzh ur sindikad a chom kuzh.



Paperenn emezelañ ouzh ar SSDKP-KHL (SNEIP-CGT)

Anv : Kentanv :

Bet ganet d'an : / / Deiziad emezelañ : / /

I – Gennad labourerezh

☐ 1^{añ} derez ☐ 2^l derez ☐ Uhel ☐ Labour-douar ☐ Gwir prevez
[AMDK (OGE) pe aozadurioù all]

Micher :

II – Stad vicher ☐ Oberiad ☐ War al leve

☐ Kelenner ☐ Dindan gevrat pe ☐ E-maez kevrat

Danvez :

Resisat ho skeul c'hoprañ (PLP, AE, Testeniet, MA...) :

Resisat ho toare kevrat (da vat, da c'hortoz, Eildileuriad) :

☐ Koskor Kelenn
☐ AES

☐ Stummer (CFC-CFA)
☐ ASEM
☐ All (resisaat) :

III – Daveennoù personel

Chomlec'h personel :

Pellgomz Diloc'h : Hezoug :

Postel :

IV – Daveennoù micher

Anv an embregerezh pe ar skol (implij pennañ ha keitrannad eur) :

Chomlec'h :

Ma labourit e meur a lec'h, o skrivañ dre lakaat ar geitrannad eur
.....

V – Dileuriet eo ar sindikad (DP, CE, DS/RSS, CHSCT...) en hoc'h embregerezh

☐ Ya ☐ N'eo ket

VI – Skodenn

Skodenn 1 % eus ar gopr miziek rik evit an oberidi pe 0,5% evit ar retriidi
(Da zalc'her soñj : didennadus eo ar skodennoù eus an tailhoù)

Dibabet em eus talañ ma skodenn : ☐ Dre chekenn ☐ Dre lamadenn emgre

evit ur sammad a € /miz

Sin :

Kasit ar follenn-zitourañ-mañ en-dro dre lizher da :

SSDKP – KHL Deskadurezh Prevez (SNEIP – CGT Enseignement Privé) - 263

straed Pariz / rue de Paris – Kombod / Case 544 - 93515 Montreuil Cedex

Pgz : 01-48-18-82-45 – postel : orga@cgt-ep.org – load : www.cgt-ep.org

Na ankouait ket follenn Lamadenn Emgre ar Skodennoù kevret gant un DAB (RIB)